




GLOAR DA ZOU E BARR AN NEÑVOU (1/2)

Muzik : Mikael Skouarneg



GLOAR DA ZOUE E BARR AN NEÑVOU (2/2)

Gloar da Zoue e barr an neñvou !
Ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezañ.

Bezit meulet, bezit trugarekeet, bezit adoret, bezit enoret,

Gloar da Zoue e barr an neñvou !

Bezit benniget evid ho kloar dispar,
Aotrou Doue, Roue an neñv, Doue an Tad oll-c'halloudeg,

Gloar da Zoue e barr an neñvou !

Aotrou Doue, Mab unganet Salver Jezuz,
Aotrou ha Doue, Oan Doue, Mab an Tad,

Gloar da Zoue e barr an neñvou !

Gloar da Zoue e barr an neñvou !
Ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezañ.

C'hwi hag a zilam pehed ar béd,
Ho-pet truez ouzom !
C'hwi hag a zilam pehed ar béd,
Digemerit galv or pedenn !
C'hwi azezet en tu dehou d'an Tad,
Ho-pet truez ouzom !

Rag c'hwi hepkén a zo santel,
C'hwi hepkén eo an uhel-meurbéd, Salver Jezuz,
C'hwi hepkén eo an Aotrou,
Gand ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Gloar da Zoue e barr an neñvou!
Ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezañ.

*Gloire à Dieu, au plus haut des cieux !
Et paix sur la terre aux hommes qu'Il aime.
Nous Te louons, nous Te bénissons, nous T'adorons,
Gloire à Dieu, au plus haut des cieux !
Nous Te glorifions, nous Te rendons grâce, pour ton immense gloire,
Seigneur Dieu, Roi du ciel, Dieu le Père tout-puissant,
Gloire à Dieu, au plus haut des cieux !
Seigneur Fils unique Jésus-Christ,
Seigneur Dieu, Agneau de Dieu le Fils du Père,
Gloire à Dieu, au plus haut des cieux !
Gloire à Dieu, au plus haut des cieux !
Et paix sur la terre aux hommes qu'Il aime.
Toi qui enlèves le péché du monde, prends pitié de nous !
Toi qui enlèves le péché du monde, reçois notre prière !
Toi qui es assis à la droite du Père, prends pitié de nous !
Car Toi seul est Saint,
Toi seul est Seigneur,
Toi seul est le Très-Haut : Jésus-Christ,
Avec le Saint-Esprit, dans la gloire du Père. Amen.
Gloire à Dieu, au plus haut des cieux.
Et paix sur la terre aux hommes qu'Il aime !*